

(54)

An tripl Evrusted.

Var ton :

Tri graic ordinalamant
 A vez c'hoant da bosed :
 Var c'hregic coant, quin ha arc'hant,
 Ne deus par d'o c'haout o gri.
 Pebez plijadur, me en asur, me en asur ;
 Pebez plijadur, tout e tium an natur.

Eur c'hreg'ic oc'h amuzo,
 Nebent e ouiot ar steg ;
 Mar er gouzoc'h sur o perzo
 Bonbonic da rei d'o feg.
 Caera plijadur ! me en asur, me en asur ;
 Caera plijadur ! tout e tium an natur.

(55)

Eur banne quin gant gemense
 Ne ra james droug ebet ;
 An eil etad eo an draze
 Erit daou zen arvabet.
 Caera plijadur ! me en asur, me en asur ;
 Caera plijadur ! tout e tium an natur.

Da g'enderc'hel ar garantez
 E vez c'hoant da gaout arc'hant ;
 Pa vez greg coant, quin ha danvez,
 Eic'h aller beza friant.
 Caera plijadur ! me en asur, me en asur ;
 Caera plijadur ! tout e tium an natur.

Un tripl evrustet eo ennez ;
 Nebent a dud o deusen :
 Ne er c'hlaq meur a vech bemdez ;
 Mes pa evruo ganen
 Pebez plijadur ! me en asur, me en asur ;
 Pebez plijadur ! tout e tium an natur.

(Vol. II, p. 54-55.)